

151 73
my friend's collection

CHANSON NEVEZ

VAR SUJET AN EFFERRIEN

PRINCIPALAMANT VAR SUJET AN TOCQUOU.

Me a fell din chang va etat
 Ar hini am beus ne de quet mat,
 Mes pes seurt micher a darre
 A fell did da guemer goude
 Me fell din beza tocquer
 Ounes e ar guenta micher.

Espicial ar blama
 Ounes so eur vicher ar gouela
 An niver bras a sistrojer
 Ens an tocquou e peb cartier,
 Lod esa gand an dour ac an avel
 Affer an tocq ne bad quet pel.

Couscoude hini a goues en tan
 Ennes a souffr ar muya poan
 Car an tocq paour a so nos de
 Eu danjur da gol e vue.
 Espicial tocq an effer chistr
 Ennes a so bepred en risq.

Couesa a ra divar e den
 Gouech en tan, gouech er vouillen
 A vichou an tocq a ve beuset
 A vichou al e ve deveit
 A vichou al e log er mes en nos
 A vichou al e ve paquet clos.

E mesq an tan ac al ludu
 Antro nos nen deus nemet enn tu
 Evel dens eur gasden,
 Evel a soug ar voure'hichen,
 An tocqueren mer goar er fat
 A el efa meur a chopinat.

Ia espicial ar re vad
 Pere a var trei a penceillat
 Ober tocquou a liva re al
 Reparin an deffoatou fal
 Ne quet avoac'h ober tocq nevez
 An hini coz so da benseillat ives.

Evit na vouio den eus a be du
 E vo great anezan ludu.
 Mar deus distruj var an tocquou
 Credet e erru hoas malheurio
 Col a ret o honor o yec'het
 An outro Doue a offancet.

Lacquat o tud en paourente
 Goude c'hoas offanci Doue
 Ma no peus leve ne badint quet pel
 Oc'h enchi re ty Yan Vourdel
 Carsa ra ar pint ac ar verren,
 E tistruer cals a voyen.

Ebars an hostaliri nos de
 Ne bado quet pel o tanvez

Ma n'o peus yec'het gant Doue
 Trugareca ente eus a se
 Efa guin ardant a guin guen
 An dra se a vago dec'h poan ben.
 Coisquet er mes alies en nos
 Allas an treou-se tout so caos
 D'ar mel da siminui
 A d'ar goad en ho hisili
 Mar doc'h den brao a puissant
 A gorf a visach den vaillant.

O vont re dan hostaliri
 C'honi dei da neur diffiguri
 No peso na grac na feçon
 Mar d'oc'h troed re d'ar boesson
 Ma no peus mignonet consideret,
 O fachiri eo a dennet.

Nan, gant den na viot carret
 Ha quemeret evit eur strolien
 Nemet ar re a vo guenec'h o efa
 Hi eo o mignonet brassa
 A hoas alies ma ret goud
 Piou en deffe muya galloud.

Mar doc'h fur a comportet,
 En no marvaillou den reglet
 O hencha an hostaliri
 C'hui a zeu da siresonni
 Gaut den ne viot silaouet.
 Pa se dal ar pez a leveret.

Ar paour ques meoyer oc'h efa
 Ennes ne espero netra.
 Ac e ve pen noas a diarc'hen,
 A disso caer e groc'hen,
 Ma elfe caout eur gouenec
 Eur bannac'h a renq c'hoas da gavet.

Ma na ve quet arc'hant ganta
 E c'houlen credit quer brao a tra
 Den brao on a den brao e vin
 Hostis ebed ne goll ganne
 Ma oll arc'hant a ya gante
 A bepret e ven en o dile.

Sonjet eta paour quez meoyer
 Ar viser o deus da dud er guer
 Te so en daffarn nos de
 Da dud er guer er baurante,
 Oc'h usan an tan ac ar goulou
 Oc'h hortos a hanout da sont en dro.

Bepret en aoun ac en nec'hamant
 Betec goud en peseurt santimant
 Evide c'hoas pa seul d'ar guer,
 Pe vi douc pe vi en coler.

Crena a reont bian a bras
 Gant, aoun da santout pouez ar vas.
 Car deus an humeur ma yezi
 Te a rei ganto tro an ti.
 Te rei de gant da gomson
 Lampat buon dreist an trejou
 Te rei de eb compassion
 Lojan dianveas ar pignon.

O veza quen didruaz
 Ous da c'hreca a da vugale
 Te rei de eben tersuen
 Loja dianveas ar planquen,
 Compren a beguement a dourmant
 E coz ar guin hac ar guin-ardant.

Ouma er fat so eur froesen
 Deus en valeuryou e seo y ar pen
 Houma eo mam an oll vichou
 Ebars en pevar c'horn ar vro.
 Gret me o ped reflexion,
 En neubet brema va son.

Var bep articl am beus expliquet
 Me o pet da bosl o speret,
 Ac e velfet en ber amzer,
 A me am beus lavaret dec'h guyer,
 An ini en deus great ar son-ma
 Mo ped na fachel qet outan.

Car evit eman d'ho quelen,
 A blich desan cals ar veren,
 Quitubonan bian a bras
 A blich deomp oll lipad an tas
 Allas dre fors mont er yago
 Eve goasquet or hostessiou.

Cetu ase an occasion
 Am beus da gomposi eur son,
 O cavet eun tam anoudegues
 Ebars en buez ar meoyer quez
 O cavout anoudeguez vad
 Ebars en buez Yan Gorfat.

An neb en deus ar son ma
 A so dibourve a bep tra.
 So eur paour quez mar deus nicun
 Alies en fot a vutun,
 Naif eo deus a Dreguer
 A c'huir en c'hasso en Quemper.

Noa quet deut anter ar sisun
 Oa manquet dezan e vutun,
 Ac en plac dounet da fumi
 Eon so deut da gomposi,
 A da rima eur ganaouen
 Var sujet an efferrien.

Chanson var sujet ar Livitennou.

PRINCIPALMENT VAR SUJET AR TOCQUOU.

D'an drivoac'h deus ar mis-ma me meus occasion,
Da occupin ma speret, da ganan eur chanson,
Eur re benac a hoerzo o clevet anezi,
Mes demeus ar hoste al me em bo fachiri.

Ar sujet deus ma chanson eo an dallidigues,
A so aru quen commun en toes ar merhet ques,
D'ar gloar a d'ar vanite hy a zo en em livret,
En renq an dimezellet e maint arri guisquet.

Me o ped potret yaouanq, pa het da vale,
Da vellet o mestrezet me e hevertis en se,
Da vousiqua eur liviten pa hefet d'o guellet,
Rag potret ar mestreno ne dint tam respetet.

Mar gariet en o zi, gouisquet prop gaut vestren,
Hui a vo diguemeret, vel eun distoladen,
A mar chomet da goannian, patates o peso
En fot caet eur liviten guisquet vel eun otro.

Ariout unan var varc'h, eur liviten gantan
Ar plac'h yaouanq deus ar zal a voelo aneza.
Mont a ra d'e diguemer gant cals deus a respet,
Dre ma en deus eur liviten a vezo regallet.

Ar plac'h yaouanq a lavar, d'ar mevel dus an ty
Laquet prest marc'h an otro, ebars ar marchossi,
A casset e valizen, bars er gambr huellan;
Fenos on bo an enor, d'e gaet da goania.

Quement a vo ebars en ty, deus a servicherien,
A vo o prepari coan da bot e liviten;
Darn o laza poncinet, darn all perdriet
Guellet peguen braz, e ze brema beza livitenec.

Guellet a ret tud yaouanq, gant tout o oll moyen,
Ne doc'h netra estimet en pot ul liviten,
Chanch a gostum a vo ret me ro dec'h alli
Vit beza oel respetet gant ar merhet a di.

Guellet o heus scleramant, caera despign a re,
Pa dari pot e liviten en o zi da vale,
Poncinet a perdriet, guin coz en ur guir ber,
Hae a bep sort liqueurio, bonbonio vit decer.

Pa ve pot e liviten partiet en e dro,
Neuze var ar bansion, calomni a vezo,
Ur re benac a santoi an dispign a vo gret,
Ur bansion desfrisson, patates a vo bepret.

Ur rumat all a so c'hoas a zoug livitennou,
En deus cals educacion mes nebeut a vado,
A voar parlant dre brincip cals a sqiant gant-se,
Hoas e pretantont cavet merhet o deus leve.

Brema o deus esper, cavet eur garg benac,
A noter, pe avocat, a so etacho mat
Laret e rei d'e bried ebars en comso ber,
Ret a vo guerza leuve da gaet carg a noter.

E bried a lar deza me zo contant a ze,
Me ro dec'h otorite da verza ma leve,
Pa o po eur garg a noter, me vo neuze itron,
Hac a vezo respetet, gant an oll e c'hanton.

Guel eo ganin angagin, an anter ma mado,
Vit cavet eun turnier douar gant e oll vestreno,
Brema ni a vo eurus, ni vezo dizourci,
Hac an arc'hant a gueo, bemde bars en on ty.

Brema pot e liviten gant e garg a noter,
En em livras d'an deboch, ne voa qet pel amser,
Bemde e ma o verza, leveyo an itron,
Chetu y rentet maleurus, ne neo qet hep reson.

An itron a gri brema, demeus a boes e fen,
Chetu me cren ruinet, gant pot e liviten,
Dispriget voa guanime, gues al pot et e vestren,
Deut e aben gant e arc'hant da brema ma moyen.

Rac-se ta merc'het yaouanq, quemeret a hanon,
Rac me a vo an exempt, d'an oll ebars er vro,
Hoant bras em boa da veza guisquet en roben,
Ar c'hraç caër vo din brema, caet cotillonnen.

Ma friet livitenec, allo brema monet,
Da honit e dam bara, d'ar parc da labourat,
A dispen e liviten, vo ret mat deza hoas,
Da ober un tam brago, d'e vuguel so en noaz.